

## DEVOTION

DA ZEIZ GLAC' HAR HA DA ZEIZ JOA

SANT JOSEPH.



E KEMPER,  
MOULET GANT AR. DE KERANGAL,  
mouler an Escopti.

RENÉ NICOLAS SERGENT,  
PAR LA GRACE DE DIEU ET DU S.-SIÈGE APOSTOLIQUE,

Évêque de Quimper et de Léon,

*Nous avons fait examiner un petit Ouvrage  
intitulé : DEVOTION DA ZEIZ GLAC'HAR HA DA ZEIZ  
JOA SANT JOSEPH.*

*D'après le rapport qui nous a été fait, nous  
regardons ce Livre comme très-utile, et propre  
à augmenter la dévotion envers Saint-Joseph.  
Nous en autorisons l'impression.*

Donné à Quimper, sous notre seing, le sceau de  
nos armes, et le contre-seing de notre Secrétaire,  
le 27 du mois de janvier 1863.



† RENÉ,  
Évêque de Quimper et de Léon  
Par Mgr. l'Évêque:  
ÉVRARD, CHAN,  
Secrétaire de l'Évêché.

# DEVOTION DA ZEIZ GLAC'HAR

HA

## DA ZEIZ JOA SANT JOSEPH.

Ann devotion evit Sant Joseph ne ket c'hoaz kals anavezet e-touez ann dud, petra-bennak eo unan euz ar c'haera devotionou a heller da gaout hag ar profitapla evit ann eneou. Ne ket eunn devotion nevez, nag eunn devotion deuet d'e-omp euz a-berz den e-bet. Jezuz-Krist he-unan en deuz desket d'e-omp enori Sant Joseph ; rak senti a rea out-han gant ar vrassa humilite hag ann denera joa. Ar Verc'hez Vari e-pad m'e deuz bevet gant Sant Joseph e deuz hen enoret evel he fried hag evel he gouarnour karantezuz ; hag he respect evit eunn den ken leun a zanterez a oa ker braz ma helle beza. Brema e gorre ann envou e veleur anezhi o kaout mui a sourci euz enor he fried santel e-ghet euz he hini he-unan. Priset e deuz bet ober da eunn niver braz a zent revelationou kaer a ziskouez peghement a dle beza enoret Sant Joseph. Da zantez Berc'het, dreistarre all, e deuz lavaret kalz a draou burzuduz evit kriski an devotion-ma. Ann eled a rente ive da Sant Joseph ar brassa enoriou var ann douar. Pa zeuent a-berz Doue da rei dezhan eur c'hourc'hemenn-bennak, na gomzent out-han nemet

gant ar brassa respet. Setu perag hor mamm zantel ann ilis renet bepred gant ar Speret-Santel , e deuz en em blijet da lakat he oll bugale da enori ha da garout Sant Joseph, ha d'her c'hemeret evit ho fatron hag ho zad. Ous-penn, guelet a reomp c'hoaz splann ann devotion ho deuz bet ar zänt da Sant-Joseph , ha dreist peb tra. ar zänt ho deuz bet eur spéret douz hag eur galoun truezuz e-kenver ar bec'herien, evel m'eo Sant Bernard ha Sant Frances a Sales. A viskoaz ive enn eurzou euz ann Ijis, e-touez ar venec'h hag al leanezed , ann devotion da Sant Joseph a zo bet unan euz ar re a zere ar muia ouz ho stad a zantelez. Oll e ouzomp e hell ar zänt hor zikour dre ho fedennou. Doue en deuz roet d'ezho, eme Sant Thomaz, ar galloud da rei d'eomp meur a dra euz ar pez a c'houennomp di gant-ho. Mez , eme Santez Tereza, Doue a ziskouez muioc'h a larghentez e-kenver Sant Joseph , da behini e ro ar galloud d'hor zikour hag enn hon oberou hag enn hon danjeriou.

Evit kriski ann devotion e-kenver Sant Joseph e heller c'hoaz komz euz ann niver braz a viraklou en deuz græt, ha dre bere ann Aotrou Doue en em blijez da ziskouez peghement e kar an dud hag a so bet devot da dad-magher Jezuz.

Ar Patriarch enorabl Sant Joseph a zo patron ann oll dud var ann douar, n'euz forz a be oad nag a be stad ; rag ann oll a gav enn he vuez a hep seurt skouer vad evit ar vertuziou a zere out-ho hag exemplou kaer da heulia evit beva e guir gristenien. Mar d'oc'h c'hoaz krouadur , sonjiten deuz Sant Joseph gouarnet Jezus kroua-

dur, ha goulennit digant-ha ar c'hraz da ober mad ho pask kenta. Mar d'oc'h arruet enn ho iaouankiz prest da gemeret eur stad a vuez, na ankounac'hai ket en deuz bet Sant Joseph kunduet Jezus pa oa iaouank, hag ho kunduo c'hui ive d'ar stad oc'h galvet gant Doue. Mar d'oc'h trubuilhet gant an tentationou a lamm ar peoc'h euz ar galouù, ho pezet fianz e Sant Joseph, en deuz bet kavet eul lcaé'h a beoc'h hag a repoz evit Jezus pa glaske Herodez en he gounar hel lakat d'ar maro. Mar emoc'h er stad a bri-delez, mar hoc'h euz eur famil da zevel, gouleñnit digant Sant Joseph ann nerz hag ar batianted gant pere en deuz bet labouret evit Jezus ha Mari.

Erfin ann oll a vell eORN bennighet Sant Joseph eur boket lys : ha piou na oar ket eo eur merk en deuz bet ar Sant-ma dre he bedennou digant Doue ar galloud da renta ann holl kaér ha dinam evel ar boket lys, ha da ober anezho Eled var ann douar dre ar burete.

Bete brema mar d'omp bet devot da Sant Joseph, trugarekeomp anezhan evel euz unan euz ar c'haera grasou hon euz bet digant-ha. Mar n'hon euz ket bet sonch d'her pidi, poent eo d'e-omp hen ober, ha kredomp mad e tennimp eur profit braz-meurbed euz hon devotion enn he ghenver. Silaoump ann ali a ro d'e-omp Santez Teresa: «Morse, emez-hi, n'em euz gouleñnet netra digant Sant Joseph heb beza bet silaouet gant-ha. Ma n'am c'hredit ket, grit evel am euz græt, ha c'hui a velo bo-unan.»

Gant ar c'hoant hon euz da greski ann devotion da Sant Joseph, hañ evit diskouez d'ez

han hon anaoudeguez vad evit ann oll c'hrasou hon euz bet euz he berz, e teuomp da ziski d'e-hoc'h petra da ober enn he enor.

Choa et hon euz he c'hlac'hag hag he joaou. Rak Sant Joseph he-unan en deuz desket d'e-omp ann devotion-ze ha gourc'hemennet d'e-omp he brudi. Enn-hi e kavomp eunn imaj a vuez anñ dud just, a dle kalz pe nebeut beza hevel ouz hini Sant Joseph. Meritet en deuz ar Sant euruz- ma beza hanvet gant ar Speret-Santel he-unan ann den just.

Sant Joseph eo en deuz desket d'e-omp ann devotion d'he zeiz glac'hag ha de zeiz joa. Setu ama ar merk euz a ghement-se :

Daou vanac'h euz a urz Sant France's enh eur veach var vor, en em gavas enn euñ taul, e kreiz eur bar amzer spontus. Raktal ar vag ho doughe oa dispennet a dammou; na choume gant-ho nemet eur planken hag e talc'hent pek-mad istrivilh out-han evit astenn ho buez ann hira ma hellont, hag evit en em brepari d'ar maro a oa bepred diraz-ho. Tri devez ha teir nosvez a dremenjont enn doare-ze e-kreiz ann danjer hag eur spont estranch. Ar gurun a groze ouc'h ho fenn, al luc'hed a darze bep mare, hag ar mor direiz a oa va ar poent d'ho lonka. Kre-di a reent oa achu d'ezho, ha pep mare e son-jent beza enn ho zremenvan; ar pez a vije arruet ive, paneved da zorn an Otrou Doue. ho dalc'he evit renta testeni da vadelez Sant Joseph enn ho c'henver. Sonch a zeu d'ezho euz ar Zant-ma hag her ghervel a reont d'ho zikour. Ker buan ar peoc'h zo enn ho speret, ha spont ar maro a zo tec'het; rag ho fianz a zo kresket.

Na heanont ho daou da bedi var bouez ho fenn ar Zant-ma en doa ho zikouret ken aliez a veach. Goulen a reont ar vuez dre ar zikour euz he beden; en em westla a reont d'ezhan en eur lavaret: Ma hellomp en em denna enz ann danger-ma, ni a implijo hon oll nerz d'hoc'h enori ha da greski e-touez ar re-all ann devotion en ho kenver.

A boan ma hø doa achuet ho feden ma oa silaouet. Hean a ra ar gurun, skleraat a ra ann amzer, kaeraat a ra ar mor, hag ar fianz o tiskenn e kalonou ar veachourien a lavar d'ezho ezint sur da veza saveteet.

Pebes joa evit-ho ! Gwelet a reont eunn den iaouank o tont d'ho diarbenn. Ho saludi a ra gant eur mouzc'harzik leun a zouster, hag en em ghinig a ra d'ezho evit ho ren hag evit ho zavetei. Heb dale, kunduet gant-ha, em'ont er porz.

Kerkent ma en em gayjont var zouar, en em dauljont var ho daoulin da dreid ann hini en doa ho zennet a zanjer. N'hen anavezent ket c'hoaz; her c'hemeret a reent evit eunn Eal. Gant ar joa n'hellent komz, na reent nemet gouela pa zellent out-han. Hen trugarekat a rejont gant komzou anter-lavaret ; prometti a rejont her meuli e-touez ann dud ha derc'hel sonch euz he vadelez e-pad ho huez. Eur c'hraz a c'houlenjont digant-ha c'hoaz, evit peurachui ho eurusted, ar c'hraz da c'houzout piou oa ha pe hano en doa. O velet ho anaoudeuez vad n'helle ket refuz d'ezho ho goulen. « Me zo, eme-z-han, Sant Joseph. Mar fell d'e-hoc'h en amzer da zont ober eunn dra-bennag hag a blij

d'in, na dremenit devez e-bet hep lavaret sez *Pater* ha sez *Ave* e memor d'ar sez glac'har eo bet karghet ma ene, ha sez *Pater* ha sez *Ave* all e memor d'ar sez Joa euz ma brassa konsolationou e-pad ma veven war ann douar e kompagnunez Jesus ha Mari.» Neuze en em guzaz out-ho, o lezel enn ho speret eunn imaj euz he c'hened, hag ar zonj euz he zouster, hag enn ho c'haloun eur c'hoant braz d'he servicha. Euruz, da sonjale hellent ober eun drabennak evit enor ann hini en doa rentet d'ezho eur seurt servich, ann daou vanac'h a ghemeraz evel eunn never evit-ho, heulia eunn devotion ken eaz, hag ober ar pez ho doa prometet : Rei d'ann oll anaoudeuez euz ann devotion a dleer da gaout evit Sant Joseph.

Guelet a rit aze peghement a blij gant Sant Joseph sikour ar re her ped, ha petra a c'houlen evit hen trugarekaat euz he vadelez. Ma fell d'eomp her servicha, na dleomp-ni ket choaz ann devotion en deuz he-unan kinnighet d'eomp? Evel pa lavarfe da bep unan ac'hanomp : « Me eo Sant Joseph, da lavaret eo, me eo ann hini e pehini a dleit lakat ho fianz : me am euz ar gallout hag ar c'hoant d'ho zikour : Jesuz, ma mab, ha Mari, ma fried, na refusint netra euz ar pez a c'houlenin digant-ho evit hoc'h. Enorit hepken gant karantez ma glac'har ha ma joa, ha c'hui a gavo sikour, hep arvar, e-kreiz c'houlennou ar mor euz ar bed-ma, e-kreiz ann danjeriou hag ar poaniou a c'hroun mab ann denn er vuez-ma.»

Mar fell d'eomp eta beza servicherien devot da Sant Joseph, keineromp ar gustum santed

da enori, liessa ma hellimp he zeiz glac'har hag he zeiz joa.

Kavout a raimp c'hoaz enn devotion-ma eur skouer a vuez evit ann dud-just ha santel. Er mysteriou euz a vuez Sant Joseph, eus a bere e koms d'e-omp ar Skritur Zantel (ha dreze mysteriou a dleomp da gredi dindan boan da vont eneb d'ar feiz), en em gaf he c'hlac'har hag he joa ; mes enn eun doare ker kaer ma n'eaz ket eur myster glac'haruz ha n'en deaz d'he heul eur gonsolation-bennak; nag eur myster joauz ha n'en deuz ive eunn tu-bennak trist. Doue en he brovidanz, kuzet ouz ann dud er bed-ma, en deuz, eme Sant Ian-Krisostom, laket e buez Sant Joseph ar melkoni hag ann douster, ar joa hag ann displijadur, enn hevelep doare, ma ne ket bet hevel ouz ar re all : hag evel-se a ra he vizerikord e-kenver ann oll dud just. N'ho c'hunduo ket ato dre hent ar Groaz, dre hent ar poaniou hag ann trubuillou; na ken nebeud n'ho c'hundu ket bepred dre ann hent kaer euz ar c'honsolationou, dre hent ann douster hag ar peoc'h; mez guech dre eunn hent, ha guech dre eunn hent-all, enn hevelep doare ma eo ho buez hevel ouz hini Sant Joseph, karghet, evel he hini, a boan hag a joa, a velkoni hag a zouster.

Ar sonj euz a ghement-se a dle lakat oll ar re a venn, e guirionez, dont da veza just ha santel, da bratika gant lealdet ann devotion euz a behini e komzer ama. Enn-hi e kavint eur zikour eaz ha kre da genderc'hel enn hent euz ar zilvidighez. Na gollint ket kourach enn ho foaniou; na zonjint ket int cur bunition a-berz

Doue, mes aliez eur merk euz he vadelez. Ann disprisans, ar goaperez na hellint ket kement ho lakat da zilezel ann hent mad. Enn ho joaon, enn ho c'honsolationou e vint var evez o sonjal e tremenint buan marteze. Guelet a rint sklear penoz ar c'honsolationou-ze n'int roet d'ezho nemet evit ho lakat da vale skanvoc'h enn hent euz ar zantelez. Tud just, grit éta aliez meditation var zeiz glac'har ha seiz joa ho Patron.

---

## SEIZ GLAC'HAR SANT JOSEPH.

---

1<sup>o</sup> Ann enkrez e pehini en em gavaz pa ouiaz en devoa ar Verc'bez gloriuz Vari concevet; ar zonj a dileje he dilezel e-kuz ; ann anken en doa oc'h he c'huitat, gant aoun da vankout da respect d'ezhi ha da lakaat drouk sonjal anezhi.

2<sup>o</sup> Eunn druez vraz e-pad ghinevelez hor Salver Jezus. ec'h her guelet paour, diauavezet, dispriset hag er boan er penn kenta euz he vuez.

3<sup>o</sup> Ann druez a zautaz eis dez goude he c'handediguez er Circoncision pa velaz pika ar mabik Jezuz gant eur gontel vein hag ar goad o redek.

4<sup>o</sup> Pa ieaz gant ar Verc'bez Vari d'ann templ evit presanti Jezus, o klevout ar Profet Sant Simeon o lavaret d'ar Verc'bez en divije eur c'hlaze a c'hlac'har treuzet he c'haloun; e vije bet he vab eunn occasion a c'houal skouer evit kalz a dad, hag ersin, o velout n'en doa netra evit prema he vabik.

5<sup>o</sup> Pa velaz e renkfe kuitaat he vro hag en

em denna enn Egypt evit kuza buez Jezus ouz kounar Herodez.

6<sup>o</sup> He enkrez enn distro euz ann Egypto klevout lavaret oa Archelauz mestr er vro , ha na glaske , evel Herodez, nemet lakaat Jezus d'ar maro.

7<sup>o</sup> Pa gollaz he vab Jezus e templ a Jerusalem, ha ma oa bet tri devez ha teir nosvez oe'h her c'hlask gant Mari, he bried.

## SEIZ JOA SANT JOSEPH.

4<sup>o</sup> Ar joa a zantaz pa zeuaz eunn Eal da rei d'e-zhan anaoudeguez euz à vyster ann inkarnation. Ann Eal a lavarez d'e-zhan a oa dre vertez ar Speret-Santel en doa ar Ver'hez concevet; hen courc'hennuaz d'e-zhan chomin gant ar Ver'hez Vari he bried a dleje lakaat er bed hor Zalver hag a oa hen oa choazet evit servichout da dad d'ar c'hrrouadur bennighet-ze.

2<sup>o</sup> Ar joa a zantaz o klevout ann Eled o kana gloar d'ar mabik gañet var ar plouz, o velout ar bastored o tant a vandennou d'hen adori.

3<sup>o</sup> Pa recevâz hor Zalver er Circoncision ann hano kaer ha gloriuz a Jezus.

4<sup>o</sup> Komziou ann den santel Simeon, pa lavare euz ar c'hrrouadur a zalc'he etre he zivrec'h , hag a bresante d'ann Tad éternel, e vije ar penkauz euz resurrection ha silvidinez ann dud.

5<sup>o</sup> Pa arruaz enn Egypt, o velout ann idolou, ann doieou fauz, o koueza araug Jezus , hag ann diaoulou trech'het dre he bresanz.

6° O velout achuet he amzer enn Egypt, a ie da zistrei adare d'he vro, hag e helje beva e peoc'h e kompagnuez Jezus ha Mari.

7° Ar joa a zantaz o kaout Jezus enn templ; ar gonzolation d'her guelout azezet e-kreiz ann doktored estlammet o klevout eur c'hrouadur ker iaouank oc'h explika d'ezho lezen Doue.

Setu aze sez glac'har ha sez joa Sant Joseph. Ar re zo boazet da ober meditation, a gavo ann tu da ober meur a reflexion var bep hini euz ar poenchou-ze, hervez ho devotion, ho stad hag ho deveriou. Ho fidi a reeur d'en em servicha anezho evit en em brepari da voueliou Sant Joseph.

Evit ar re na ouzont ket ober meditation, e lakomp ama en doare all da enori sez glac'har ha sez joa Sant Joseph.

---

4° O pried dinam Mari, gloriuz Sant Joseph, mar eo bet braz ann anken hag ar glac'har euz ho kaloun e-pad ma oc'h bet enn arvar ha e'hui a dleje kuitaat ho pried glann, ker braz eo bet iveauz ar joa a roe d'e-hoc'h ann Eal oc'h c'hourc'henn d'e-hoc'h a-berz Doue non pas he c'huitaat, ha da veza he fried fidel, a oac'h choazet evit servicha da dad d'he vab, hor Zalver

Dre ar glac'har bag ar joa-ze, me ho suppli, plijit gan-e-hoc'h, konsoli ma ene e-pad ma buez; hag er moment euz ma angoni, goulennit evid-oun digant Doue eur maro euruz ha santel, hevel ouz ho hini, etre divrec'h Jesus ha Mari.

*Pater... Ave... Gloria... etc.*

Sant Joseph, patriarch eurus, choazet dreist ann oll dud evit servicha da dad da Zalver ar bed, ar glac'har a dreuzaz ho kaloun, o velout ho mabik ganet enn eur baourenteze ker braz, a chenchaz enn eurjoa vrat, pa glevac'h ann Eled o kana gloar d'ezhan, ha pa velac'h ar bastored daoulinet diraz-han.

Me ho ped dre ar c'hlac'har hag ar joa-ze da c'houlenn evid-oun digant Doue, goude ann anken hag ann drubuilh euz ar vuez-ma, ar c'hraz da vont eunn deiz da joaou ann env, da glevout eno kan melodiuz ann eled, ha da velout gant karantez e-pad ann eternite gloar ar Zäent.

*Pater... Ave... Gloria...*

O c'hui, hoc'h euz miret ker mad goure'hennou Doue, gloriuz Sant Joseph, pebez rann kaloun evid-hoc'h o velout ho mab o skuilla he oad er Circuncision ; mes pebez levenez ha pebez joa evid-hoc'h ives o klevout hen henvel Jezus.

Goulennit evid-oun digant Doue, dre ar c'hlac'har hag ar joa-ze ar c'bras da ober brezel e-pad ma buez d'am zechou fall, d'ho zrec'hi oll ha da veza euruz a-voalc'h da verval er joa enn eur lavaret a c'chinou hag a galoun ann hano santel a Jezus.

*Pater... Ave... Gloria...*

4° O den euruz ken leun a anacudeguez euz mysteriou hor redemptions, Sant Joseph, mar en deuz komziou Sant Simeon daou-hanteret

ho kaloun, o lavaret d'e-hoc'h poaniou Jezus ha Mari, pebez konsolation evit ho madelez oc'h her c'hlivet o lavaret ive penaus he boaniou ho devije meritet d'ann dud ar zilvidighéz hag eur resurrection gloriuz ?

Goulennit evid-oun digant Done dre ar gla-c'har hag ar joa-ze ma vezin euz ann niver euruz enz ar r'a resuscito evit ar vuez eternel dre veritou Jezus-Krist ha dre zikour peden-nou ar Verc'hez glorius Vari.

*Pater... Ave... Gloria...*

5° Gouarner mad ha fidel mab Boue en em c'hret den, Sant Joseph, peghement a boan hoc'h enz kemeret, peghen brevet hoc'h euz ho corf evit her maga ha pourvei d'he ezomou, dreist pep tra, pa oac'h enn Egypt pell enz ho pro? mes ive pebez levez evid hoc'h beva ato enn he gompagnuez, pebez joa ho poa o velout idolou ann Egypt o kouëza da dreid Jezus?

Goulennit evid-oun digant Doue, dre' ho klac'har hag ho joa, ar c'hraz da bellaat d'oc'h Satan, oc'h en em denna pell euz ann occasio-nou da bee'hi; ar c'hraz d'en em gonsakri ervad da zervich Jezus ha Mari, evit na vevin mui nemet evit-ho, ha ma hellin rei d'ezho gant joa ma huanaden diveza.

*Pater... Ave... Gloria...*

6° Sant Joseph, guir eal ann douar, c'hui a gommande da roue ar ronaned, ankeniet oe'h bet, o klevout e talc'he Archelaus lec'h he dad; krena a reoc'h evit ho mab a zigassac'h euz ann Egypt gant aoun rak kounar ann tirant-ze

hevel ouz Herodez ; mes heb dale oc'h bet konsolet gant eunn eal, hag e teuac'h da chomm da Nazareth gant Jezus ha Mari.

Goulennit evid-oun digant Doue, dre ho klac'har hag ho joa, ma vo-delivret ma c'haloun euz ann dristidighez hag ar spont a helfe miret ouz-in da garet Doue, ma vevin er peoc'h euz eur goustianz neat, ha ma varvin contant enn eur lavaret Jezus ha Mari.

*Pater... Ave... Gloria...*

Skouer hag imaj a zantelez, gloriis Sant Joseph, pa gollach, heb lec'h e-bet da veza tamallet, ho mab Jezus, c'hai a zalc'h mad d'her c'hlack e-pad tri devez, er brassa anken. Gant eurjea heb he far her c'havac'h enn templ.

A-greiz ma c'haloun ho pedann da c'houlenn evid-oun digant Doue, dre ho klac'har hag ho joa, ar c'hraz d'en em viret euz ar maleur da lakaat Jezus er-meaz euz ma c'haloun dre ar pec'het marvel ; mar tigouez d'in her c'holl ma her c'hlaskin gant glac'har tre ken am bezo her c'havet, dreist pep tra, enn heur euz ma maro, evit ma hellin mont gant ha d'her gue-lout faq ouz faq er baradoz, ha da gana e-pad ann eternite, he vadelez hag he vizerikord peur-baduz.

*Pater... Ave... Gloria...*

Y. Pedit evid-omp. Sant Joseph.

N. Ma veritimpa kaout lod e promessaou Ježus-Krist,

PEDEN.

Plijit gan-e-hoc'h, ma Doue, receo evid-omp,

meritou, pried ho mamm zantel, evit ma hor  
bezo, dre ar zikour euz he bedennou, ar pez na  
hellomp ket da gaout ac'h-anemp hon-unan.

*Amen.*

---

### LITANIOU SANT JOSEPH.

---

**Doue**, hon tad oll galloudek, hor c'houer,  
    Ho pet truez ouz-omp.

**Doue** ar mab, hor Zalver,  
    Ho pet truez ouz-omp.

**Doue** ar Speret-Santel, a zantifi hon eneou,  
    Ho pet truez ouz-omp.

**Drinded** Santel, eunn Doue hepken,  
    Ho pet truez ouz-omp.

**Santez Mari**, mamm da Zoue, pried Sant  
    Joseph, Pedit evid-omp.

**Sant Joseph**. pried Mari, Pedit evid-omp.

**Sant Joseph**, tad magher mab Doue, en  
    em c'hræt den evid-omp, Pedit.

**Sant Joseph**. hoc'h euz dalc'het e-keniver  
    Jezus lec'h ann Tad eternel var ann  
    douar, Pedit.

**Sant Joseph**, santel hervez kaloun Doue, Pedit.

**Sant Joseph**, servicher fidel ha leun a  
    furnez, Pedit.

**Sant Joseph**, gouarnier guerc'hded Mari, Pedit.

**Sant Joseph**, karghet a zonezonou ar  
    Speret Santel, Pedit.

**Sant Joseph**, dinam ha guerc'h, Pedit.

**Sant Joseph**, leun a humilite, Pedit.

**Sant Joseph**, gouiziek er beden, Pedit.

**Sant Joseph**, leun a garantez birvidik, Pedit.

- Sant Joseph, hanvet gant ar Speret Santel  
den just, Pedit.  
Sant Joseph, hoc'h euz bet digant Doue  
kement a anaouudeuez a vyster ann  
Incarnation, Pedit.  
Sant Joseph, gouarner mab Doue, Pedit.  
Sant Joseph, enoret dre oboissanç parfet  
Roue ar Rouaned, Pedit.  
Sant Joseph, hoc'h euz bet e-pad ke-  
ment a vloaveziou buez mab Doue evit  
skouer euz hoc'h hini, Pedit.  
Sant Joseph, hoc'h euz guelet, evel Mari  
e buez Jezus kement a vurzudou  
kuzet outz ann dud oll, Pedit.  
Sant Joseph, ken doughet d'ar silans ,  
evel Jezus ha Mari, Pedit.  
Sant Joseph, dianavezet gant an dud,  
mes karet hag enoret gant Doue, Pedit.  
Sant Joseph, ar brassa euz arbatriarched, Pedit.  
Sant Joseph , maro ker santel etre di-  
vrec'h Jezus ha Mari, Pedit.  
Sant Joseph, hoc'h euz roet d'anavezout  
d'ann eneou dalek'het el limbou done-  
dighez Jezus, Pedit.  
Sant Joseph , a zo, evel ma kreder, re-  
suscitet gant Jezus-Krist da zul Fask,  
gant kalz a zænt all, Pedit.  
Sant Joseph, savet ken huel enn Env, Pedit.  
Sant Joseph , Tad ka konsolation ann  
eneou afflijet, Pedit.  
Sant Joseph, alvokad ar bec'herien, Pedit.  
Sant Joseph, ker pinvidik a c'hrasou, Pedit.  
Sant Joseph, patron ar re a lak ho fianz  
enn hoc'h, Pedit.

Sant Joseph, patron ann oll euvrou mad, Pedit.  
Sant Joseph, difennour kre ann Ilis, Pedit.  
Sant Joseph, patron special ar re zo enn  
angoni, Pedit.

Oan Doue, pehini a effas pec'hejou ar bed....  
Ho pet truez ouz-omp, etc.

¶. Pedit evid-omp. Sant Joseph.

¶. Evit ma veritimp kaout perz e promessaou  
Jezus-Krist.

#### PEDOMP.

Grit, ma Doue, ma kavin e meritou pried  
euruz ho Mamm zantel, ar zikour hon euz e-  
zom, evit ma hellimp kaout, dre nerz he be-  
dennou, ar grassou na hellomp ket da gaout  
ac'hanoomp hon-unan. AMEN.

---

#### AVE JOSEPH.

Me ho salud, Joseph, leun a c'hraz ; Jezus  
ha Mari a zo gan-e-hoc'h ; c'hui zo bennighet  
dreist ann oll dud, ha bennighet eo mab ho  
pried zantel, Jezus.

Sant Joseph, tad magher Jezus pried glann  
ar Verc'hez gloriuz Vari, mamm da Jezus,  
pedit evid-omp pec'herien, brema ha var ann  
heur euz hon maro. AMEN.

---

#### MEMORARE SANT JOSEPH.

Ho pezit sonj, Sant Joseph, tad leun a dru-  
garez, a lavar Santes Teresa, n'hoc'h euz ket  
biskoaz he abandonet, pa e deuz bet rekourz  
d'ho protection, klasket hoc'h assistanz, ha

goulennet sikour ho pedenñou. Gant ar memes fianz , o ma zad karantezuz ! e redann e-trezeg hag enn-hoc'h, e tuann daved'-hoc'h, hag en em strinkann , pec'her glac'haret, d'ho treid. O Sant Joseph karantezuz ! na zisprizit ket ma fedennou, mez plijit gan-e-hoc'h ho silaou hag ho receo.

---

### CONSECRATION DA GALOUN SANT JOSEPH.

O kaloun Sant Joseph, leun a zantelez ; kaloun ann enorapla euz ar batriarched ! kaloun pried santel mamm Jezus ! kaloun tad magher Zalver ar bed, goulennit evid-omp digant Doue ha digant he Vab Jezus ar c'hraz da gaout eur galoun hevel ouz he hini, er silanz, en dousster, enn humilité, er garantez, enn oboïsanx hag er burete. O kaloun Sant Joseph, plijit gan-e-hoc'h ma gouarn ha mà zicour e-pad ma oll buez ! Goulennit evid-oun ann donezon a berseveranz hag ar c'hraz da verval evel-d-hoc'h etre divrec'h Jezus ha Mari. AMEN.

---

### ENN HENOR DA SANT JOSEPH.

---

Ton : *Me glev eur vouez douz ha tener.*

#### KENTA GUERZ.

O Sant Joseph, pried Mari,  
Ha tad Jezus, Zalver ar bed !  
De-hoc'h-hu enor ha meuleudi  
Digant ar Zænt hag ann Eled.

Tad hor Zalver,  
Leun a zouster,  
M'ho kemer evit ma Fatron.  
Tad hor Zalver,  
Leun a zouster,  
Da c'houarn me rode-hoc'h ma c'halon.

C'hui zo eur skouer a zantelez,  
Eur mestr ato fur ha gouiek  
ENN hent euz ar zilvidighez,  
Grit d'ho servicherien redek.

Tad hor Zalver, etc...

Joseph, mellezour alaouret  
Euz kaloun Jezus ha Mari,  
Santel ato hoc'h euz bevet  
Roit ive ar c'hraz-ze d-omp-ni.

Tad hor Zalver, etc...

Tad magher ha gouarnour Jezus,  
Er brezel, enn tentation,  
Joseph, ma mestr karantezuz,  
Ah ! gouarnit, gouarnit ma c'haloun  
Tad hor Zalver, etc...

Jezus er bed-ma ker sentuz  
Ouz ho komzou e Nazareth,  
Brema var eun tron gloriuz  
N'hello refuz d-e-hoc'h tra e-bet.

Tad hor Zalver, etc...

Mari, c'hui eo ma fatronez,  
C'hui eo ive ma Mamm zantel.  
M'hoc'h enor evel ma rouanez  
Gant Joseph me vo d-e-hoc'h fidel.  
Tad hor Zalver, etc...

Joseph, o kundai ho micher,  
Jezus ho sikoure bepred ;  
E-pad ma labour, ma mizer,  
Sellit ouz-in ive m'ho ped.

Tad hor Zalver, etc...

'Tre diviec'h Mari ha Jezus  
Da Zoue e rentit hoc'h ene  
D'ezho, o Tad karantezuz,  
Offrit ma zremenvan ive.

Tad hor Zalver, etc...

---

## EIL GUERZ.

---

Salud, Joseph, tad hor Zalver,  
O Den santel leun a zouster,  
Salud, gouarnour fidel Jezus,  
Oh ! Sant Joseph mil guech euruz.

Na douz a oa d'ho karante  
karout eur mab a zo Doue ;  
Doussa deiziou, kaera amzer  
Zo tremenet gant hor Zalver !

G'hui a oa euruz gant Mari,  
He c'hrouadur oa hoc'h hini.  
G'hui her c'hare, hen ho kare,  
Na braz a oa ho levene.

Evel Mari, he vamm zantel,  
D'he zevel c'hui so bet fidel,  
C'hui her galv ho mab, ho Toue  
Jezus d-e-hoc'h ro mil joa ive.

G'hui hen dougue, 'tre ho tivrec'h

Evit eun tad na skanya bec'h !  
Jezus, dreist ann oll densoriou,  
Oa ar c'haera euz ho madou.

Jezus ouz-hoc'h en deuz sentet,  
Rak ma hoc'h euz bet he zavet.  
O Sant Joseph, pebes enor  
Evit-hoc'h kaout eur seurt tenzor.

Ar beket lys euz ho parded  
En doa evit-hoc'h meritet :  
Gant Done ar grason kaera  
A ouffler da gaout er bed-ma.

Euraz a vo ar gristenien,  
Ma klaskent enn-hoc'h ho zouten,  
Ann eneou ho po gouarnet,  
A lugerno gant ar burded.

Dilivret ho poa bet Jezus  
A goudar Herod ambitiuz ;  
Meaz ar vro ho poa hen doughet,  
ENN Egypt ho poa her c'huzet.

Joseph, mirit hon eneou  
Ouz ann aerouant hag he ardou.  
D-hoc'h-hu ni hor hezo rekour,  
Plijit gan-e-hoc'h dont d'hor zikour.

Gant Mari ho manam bennighet  
Jezus, e vezimp sikouret ;  
Ha sant Joseph ho tad magher,  
Hon soulajo enn hon mizer.

Jezus, grit ma vezimp eunn de  
E-tal ho tron e-lein ann ee ;

Neuze bepred ni ho meulo ,  
Neuze bepred ni ho karo.

Salud, Joseph, gouarnour Jezus,  
Er barados c'hui zo euruz !  
O Joseph, pried mamm Doue,  
Pedit evit-omp-ni ive !

---

### TREDE GUERZ.

---

Var ton : *Santez Mari... pe : Nijit, El mad..;*  
pe : *C'est le mois de Marie.*

#### DISKAN.

Sant Joseph, pried Mari,  
Tad magher da Jezus,  
Ni fell d'e-omp hoc'h enori,  
Patroùn karantezus.

Mirer choazet gant Doue  
D'he Vap ha d ar Verc'hez,  
Bet hoc'h euz enn ho pue,  
Anken ha levezenez.

Evit dighemer Jezus  
N'hoc'h euz na tan, na ti ;  
Ho kalon zo evurus  
O tont d'hen adori.

Pa glask Herodez Jezus,  
D'hel lakat d'ar maro,  
Gant pebez feiz burzuduz  
Her c'hassit da bell-bro !

Pebez poan ! e-pad tri deiz  
Jezus a zo kollet ;  
Goude pebez levenez !  
Jezus hoc'h euz kavet.

Ho labour enn deuz maghet ,  
Ho Crouer, Mab Doue ;  
ENN he labour Mestr ar bed  
Ouz-hoc'h-hu a zente.

Var ann douar trubuillet,  
C'hui brema enn envou  
A zo gallouduz-meurbed ,  
Roit d'in ma goulennou.

Jezus a bleg d'ho peden  
Hag he Vam, ho pried :  
Eur c'hraz am euz da c'houlen ,  
Eur c'hraz d'in goulennet.

Pa vin galvet gant Doue ,  
*Patroun ar maro mad ,*  
Deut, gant eun dourn a drue  
Serrit ma daoulagad.

Tost d-e-hoc'h ha tost da Vari  
E-kichen tròn Jezus ,  
Ra z'in enn env d'ho meuli ,  
Ma fatroun evurus !

